

13 - MARI KERNOAZH

Marie Kernoazh

N'anavezit ket Mari Kernoazh
Damwisket evel raned ar wazh

Dizolo kaer eo roll he gouzoug
Aezet da skourrañ ouzh ar groug

Dizolo kaer eo he c'halon
Ur fregadenn ledan ha don

Ilin ha brec'h ma dimezell
Zo noazh betek he divc'hazell

O vont da vérat toaz ez oc'h
Pe o vont d'aozañ boued ar moc'h

Sevel a ra kalon an den
O welout ar pezh digempenn

Me na brenin ken ipeka
Gwelloc'h e kavan, evit netra

Kuzhit ho kroch'en, Mari gaezh
Na pa ve ken nemet gant ar vezh

Mard eo ar baourentez ' zo kaoz
Eo berr ho korfenn hag ho prozh

Disul me lâro d'ar person
Astenn un tamm bihan e bron

Ober ur gest e-barzh an iliz
Evit prenañ deoc'h brozh hag hiviz

Hiviz ha brozh ha korfenn deoc'h
Ma vefet kempenn evel pep plac'h

*Ne connaissez-vous pas Marie Kernoazh
A-demi vêtue comme les grenouilles du ruisseau*

*Son tour de cou est bien dénudé
Facile à suspendre à la potence*

*Son cœur est très découvert
Une déchirure large et profonde*

*Les coudes et les bras de ma demoiselle
Sont nus jusqu'aux aisselles*

*Allez vous égoutter la pâte
Ou préparer la pâtée des cochons*

*On a le cœur qui se soulève
En voyant cette débraillée*

*Moi, je n'achèterai plus de vomitif
Je trouve bien mieux pour rien*

*Cachez votre peau, ma pauvre Marie
Ne serait-ce que par honte*

*Si c'est par pauvreté
Que votre corsage et votre jupe sont courts*

*Dimanche je demanderai au curé
D'allonger un peu son prone*

*De faire une quête à l'église
Pour vous payer jupe et chemise*

*Chemise et jupe et un corsage
Que vous soyez bien mise comme les autres*


Hag ul loeroù stamm stouvet mat
Ne vo ket ur vezh deoc'h o lakaat

*Et des bas de laine bien fermés
Que vous n'aurez pas honte de porter*

Albéric Le Graet devait participer à ce CD, malheureusement il nous a quittés prématurément en novembre 1997 avant de pouvoir enregistrer la chanson qu'il avait préparée. Il a donc été nécessaire de faire appel aux trop rares enregistrements de lui que l'on possède. « Mari Kernozh » a été enregistrée le 10 novembre 1996 à Vieux-Marché au cours d'une veillée organisée par l'association Traon an dour. Cette chanson a été publiée dans la revue Arvorig de novembre 1994.



Albéric Le Graet



Sylvain Le Roux